



RECIT GUIRION

Demeus ar maleuriou horrupl c'hoarrezet an 8 eus a vis C'huevrer diveza 1843, er Guadeloup, dre ur Grenamant-Douar hac un Tan-Goall ar spouronnussa, pere o deveus distrujet ha pulluc'het oll ar guær gaer a Point-a-Pitr. (1)

Var ton : *Ar Maro hac an Den Demezet.*

Pobl eus a Vreiz-Izel, Christenien generus,
C'houi pere voe atao güir vugale Jesus,
Selaouit, me ho ped, en hano a Zoue,
Ur recit truezus a doucho hoc'h ene.

(1) Enezen vrás Guadeloup a zo ur C'holoni a Franc, situet en Ameriq: Eno eo bro ar suer, ar c'hase, ar butun, ar c'hoton, an indigo, ar plant medecinerez, etc., etc., etc.

Ar Point-a-Pitr, e pelec'h eo let ar ravach, a voa ur guær gaer ha neve, batisset e 1753. Tyer a 2 ha 3 estach a voa enni, ha 50 ru. Distruijet oll int bremà !

2



**E mis Meurs , bars er bloa mil eiz cant nao
ha trêgont ,
E voe roet dêc'h oll un detaill leun a spont
Var Crenamant-Douar enezen Martiniq ,
Un andret ar c'haera demeus an Ameriq.**



**Hirio , ô va Doue ! e zeus goassoc'h maleur
Da zont da zisclêria dêc'h-u oll , va breudeur :
Rac-se ta , Bretonet , tud a religion ,
Deut d'am zelaou , m'ho ped , gant calz attantion .**



**Ur Grenamant-Douar , demeus an horrupla ,
An eiz a vis C'huevrer demeus ar blavez-mâ ,
D'unneç heur nemet qart a zo bet c'hoarvezet ,
Hac en ur minut en deus oll distrujet .**



**Er Guadeloup e zeo arruet ar maleur :
Selaouit gant anqen , me ho ped , va breudeur .
An douar tro ha vardro zo en em digoret ,
Hac an oll tyer kær a zo n'em discaret .**



**Ar spouron , ar c'hri fors a gargue a horror ,
An douar a vrancelle vel ar môr e fulor :
Hac evit cresqi c'hoas ur maleur qen eüzus ,
An tân-goall zo dre oll gant un nerz farius .**



Ar guær a Point-a-Pitr zo rentet e ludu ,

3

An desolation a ren eus a bep tu.
 Ebars er spaç qen bêr demeus ur minuten;
E zeus maro eno ouspen pemp mil gristen!



An douar a fraille, ha deus an abimou
 E velet gant spouron sortial ar flammou.
 Caer o d'oa an dud qèz clasq en em sovetat,
 Brêvet e voant qerqent dindan ar vein a blat.



Qer crén ha qen horruplvoa'r C'hrenamant-
Douar,
 Ma laqe meneziou qerqent d'en em discar,
 Pere o deus stânget dre oll an doureyer,
 Ar pez a gresq meurbet d'an dud qèz o mizer.



Ar re o deus ellet beza bet achappet,
 Zo privet a bep tra hac en oll revinet,
 Rac an tân-goall horrupl a zevor a bep tu,
 Hac a reduis pep tra en glaou hac en ludu.



An dec c'huevrer e zoat occupet tro vardro.
 Da zizolo dre oll an dud a voa maro:
 Ar spont rac ar vocen a rô qer bras horror,
 Ma voet forcez neuze d'o stlepel bars er mor.



Tri gostez an ilis zo en em discaret,
 Var an hini chommet gant eston e velet
 Cadran an horolach chomet just var an heur.

4

È pini voa c'hoarvet eus ar guær ar maleur.

Tremen pemzec cant deu demeus a re vlesset
 Zo ellet sovetat gant ur soign ampresset.
 Oh ! terrupla arvest zo eno da gompreñ :
 Sònjit, sònjit en ze, me ho ped, christenien !

Gouarner ar Guadeloup a scrif da gass sicour
 Ar buanna possabl d'an oll zo hep recour :
 Hastit, hastit aso, n'an Doue, me ho ped ,
 Rac amâ e vanq oll : repu, dillad ha boued.

Mein, briennou, ha râ, qement zo necesser
 Evit sevel tyer d'an oll zo er vizer.
 Hastit prest, m'ho supli. Oh ! n'ellit qet compren
 Peguer bras eo hor poan, hon ezom, hon anqen.

Qement elfet scrifa var an oll maleuriou
 C'hoarvet er Guadeloup hac en e c'harteriou ,
 N'else despeign ervat an horrol arruet
 Er yrô miserabl-se , ouz se bet assuret.

Mar deo hor Breiz-Izel, dre arc'hraç a Zoue,
 Bet atao prezervet a zeurt calamite ,
 Rentomp graçou dezân demeus eur seurt
 boneur ,

En eur dont da zicour hor breudeur er maleur.

Ar Guadeloup a zo ur goloni a Franç ,

5

A dle en he maleur receo hon asistanç:
 Eno hon eus querent p'otramant mignonet,
 Hac a c'houlen ganemp ma vezint sicouret.



Ma vez ur seurt maleur, mes Doue da viro,
 O touguen ar ravach, o tistruji hor bro,
 Me er goulen ouzoc'h : na vec'h-u qet presset
 Ebars en ho maleur da veza sicouret?



Arabat e zê demp, var digarez int pell,
 Mancout d'en em hasta da zont da rei ur zell
 Varhorbreudeur christen, rentet quer maleurus:
 En eur dont d'o zicour, e plijimp da Jesus.



Pepini ac'hanomp, herves m'hon eus moyen,
 A dle n'em ampressi evit dont d'o zouten.
 Ur guenneguic benac, roet en han' Doue,
 A vo recompancest un deiz e gloar an eê.



Hon Roue generus, querent m'en deus clèvet
 Comz eus ar maleuriou a zo bet arruet,
 En deus casset ractal ur som considerabl
 Da zicour an dud qèz rentet quer miserabl.



An nombra victimou zoouspen pempmilden,
 Ze a ra fremissa calon peb güir gristen.
 Da drègont million e za'n danvez collet,
 Ha daou-uguent million an tyer distrujet.

6

Un ozac'h d'eur zoudard a gonfi e vuguel;
 Ar sez all, va Doue, o deus ranget mervel!
 Un all a lavare : cetu din-me collet
 Va fortun, va c'herent, ha va oll mignonet!

E Poent-a-Pitr neus qet un ty hepken er za;
 Mes allas! va Doue, ar pez zo ar goassa,
 Tud a bep oad dalc'het dindan an atrejou
 A gri dont d'o zicour, hac a zo victimou.

An tân-goall furorus, vel ar môr e counnar,
 A avanç hac a lonq ar pez zo n'e bouvoar.
 Ar paour, ar pinvidic, en douar digoret,
 Pe en tân horrerus o bez o deus cavet.

Qement a dud maro a voe neuze cavet,
 N'ellet o enterri, ma voent qerqent dévet.
 Ar flêr eus ar c'horsou a ro aon da bep den
 Na zeufe prest goude en o zoues ar vocen.

Scrifet eus d'ar Mériou an arrondissamant
 D'ober ur souscription hep faut incontinent;
 Rac-se, va c'henvrois, deposit hoc'h offranç
 Ebars o bureau you gant an oll gonfanç.

En kær ha var ar meaz dre oll ebars er Franc,
 Eus souscriptionou vit receo peh offranç!

7

Ar prima moyen eo, hac ar surra hep mar,
Da zicour victimou ar c'hrenamant douar.

◎

Ansin , en ilisou e vo ive qestet
Evit sicour an dud a zo oll revinet.
Pa lavar Jesus-Christ e zomp-ni oll breudeur,
Hastomp-ta da zicour ar re zo er maleur.

◎

Ar maleur a zo bras , allas ! ô va Doue !
Hor charite a ranq beza ta bras ive :
Pedomp ive Doue ma zay oll da repos ,
Ar re a zo maro , da joa ar Barados.

Kær ha var ar meaz er vro-ze zo goloet oll a
 dud hac a anevalet maro. — Mervel a rēr gant
 an naon ; en em difframma rēr ur batazezen, ur
 grizien ; dont a rēr da anlevi an anevalet acha-
 pet d'ar maro. — An oll forniou a zo discaret ;
 ar vagasinou bleud zo dindan an douar, pedêvet ;
 ar vêlinou distrujet : e zoar e presanç ur guer-
 nez horrupl. — Un ty scol merc'het zo discaret,
 25 potrezic hac ar vestrez zo ecrazet. — Guelet
 e zeus berniou tân o sortial diouz an mōr , tost
 d'an aud. — Ur plac'h yaouanq o clasq achap
 eus e zy, a zo discaret ha qemeret dre e diouar
 dindan ar vein. Guelet a ra gant spont an tân o
 tostât.... Crial a ra da eur zoudard trec'hi dezi
 e diouar : ar zoudard a zav e zabren, mes ar fla-

8

mou en ampech da renta ar zicour horrubl-se,
hac ar plac'h maleurus a zo reduiset e ludu!

Ar flêr eus ar c'horfou maro a zo quer crén, ma
ranquer o dêvi gant râ beo querqent.

Nac a horroliou, va Doue! Amâ ur famill an-
tier ecrazet; aont, ur c'horf troc'het dre anter;
un all bruzunet oll; ur mignon o terc'hel dorn
e vignon, lazet o daou. — Ur plac'h yaouanq,
arruet dêc'h, hirio e diouar troc'het; un all deut
follez, a grie : Perac caout aoun rac ar c'brena-
mant douar, pa oun e ty va mam? — Un ozac'h
a rede evel undisqantet, en ur disquez e voalen
a eured hac o crial : Cetu amâ qement a chom
ganén eus va oll famill!...

Avoalc'h eo ze..., tevomp.

Ar Franç oll a hirvoud var ar maleur horrubl
zo o paouez sqey e c'holoni ; — mes an druez
pehini na ra nemet scuilla daelou hepqen, a zo
en druez disfrouez : Neo qet avoalc'h meuli ur
zonjeson vad... ret eo sicour d'e executi.

FIN.

Dre autorisation an Autrou Sous-Prefet a Vontroulez,
ur Souscription a zo digor e ty LÉDAN, imprimer. Nep
piou benac en dele c'hoant da zeposi e offranç, a vez
recevet da hep heur. Ar pez a vez recevet a vez rentet
d'an Autrou Sous-Prefet.

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.